



Prinsezig an dour

<https://hdl.handle.net/1874/379610>



G. TH.
ROTMAN



PRINSEZIG AN DOUR



LEVRIOU AR VUGALE
" GWALARN " BREST 1927



VAN HAMEL

558

vervallen


E DONATIONE

A. G. van HAMEL

PROFESSORIS
ORDINARIJ IN
ACADEMIA
RHENO-TRAIECTINA
1923—1946

3837

B III 6 Rot 2



3837

5 levr moulet war baper Holland

Pep gwir miret striz gand an aozer
G. Th. Rotman, Rotterdam

RIJKSUNIVERSITEIT UTRECHT



1554 1836

3837

B III b Rot 2

gle

Levraoueg Gwalarn

Niv. 7

PRINSEZIG AN DOUR

Savet ha skeudennaouet
gant

G. TH. ROTMAN

trôet gant

Y. DREZEN ha R. HEMON

Instituut voor
Keltische taal—en letterkunde
der Rijksuniversiteit te Utrecht

Kenta Mouladur

Moulerez, 4, Straed ar C'hastell
Brest 1927



vervallen

Instituut voor
Keltische taal — en letterkunde
der Rijksuniversiteit te Utrecht



Eun abardaez, diwezat tre, pa oa an heol o tiskenn hag oc'h alaouri ar gwez, e kerze eur c'hoadour a-hed eur wenodenn dre ar c'hoad. Echui e oa gantan e zevez labour, hag edo o vont d'ar gêr. A daol trumm e klevas eur vouezig tanno, o ouela goustadik war gostez an hent. Mont a reas da welout, ha... biskoaz kemend-all ! eno, war skourrig izela eur wezenn, edo azezet eur plac'hig vihan, vihan, bihanoc'h eget dourn eun den.



Ar c'hoadour a welas dioustu e oa bugel eur
gornandonez : diouaskell he doa, hag eur stere-
dennig aour oa war he bleo.

— O, o, pegen diskiant oun bet ! emezi en
eur zifronka. N'hellan ket nijal c'hoaz ha kouls-
koude, klasket em eus ! Ha mamm n'eman ket er
gêr ! Me ho ped, aotrou, va c'hasit beteg eil fore'h
ar wezenn-man. Rak eno eman hon ti.



Ar c'hoadour, avat, a grogas er plac'hig vihan, hag he dalc'has tost d'e fri da sellout piz outi.

— Evel-se 'ta, bugel eur gornandonez out ? emezan. Ma ! deus ganin. Arc'hant a c'houlennin digand an dud a zeuio d'az kwelout, ha pinvidik e vin hep dale !

Ha daoust d'ar plac'hig da lenva, ar c'hoadour he lakaas en e c'hodell hag a yeas d'ar gêr.



— Sell 'ta petra am eus degaset aman ganin !
eme ar c'hoadour, laouen, d'e wreg. Emaomp o
vont da c'hounit kalz arc'hant, ha n'hor bezo mui
ezomm da labourat.

Ha gand 'eun tamm kleiz e skrivas war ian
nor : « AMAN E C'HELLER GWELOUT BU-
GEL EUR GORNANDONEZ ». E-leiz a dud a
zeuas bemdez da welout. Hogen ne blije ket re en
holl da Lizig, — hennez a oa ano ar plac'hig, —
beza eno, hag an holl dud vras divalo-se o sellout
outi.



Eun abardaez e lavaras gwreg ar c'hoadour
eun dra bennak d'he fried e pleg e skouarn, hag
heman a reas « ya » gand e benn. Neuze!... bugale
geiz ! an den fallakr-se a grogas en eur sizailh hag
a drouc'has diouaskell vrago Lizig. Hag e tennas
ouspenn ar steredennig laour diwar he bleo.




D'an noz e veze rôet d'ezi da gousket eur pod-sukr koz e-giz gwele. N'oa ket eur gwele blot-blot, a dra sur, hogen fizians he doa d'en em voaza gand an amzer.

Nebeut ha nebeut e kreskas Lizig. Ha neuze he devoe a bep seurt labour d'ober e-barz an ti.



Bemdez e ranke gwalc'hi ar fourcheteziou, al loaïou, ha torcha lunedou ar vaouez. D'ar gwener e veze c'hoaz gwasoc'h. Neuze e ranke lakaat koar war an daol ha pura ar c'hantoloriou kouevr bras d'o lakaat da luc'ha evel an aour. Pa ne veze ket graet mat al labour ganti, e veze serret e-barz eur voest kartons. A drugarez Doue, e kavas eur vignonez.



Eur gwener eta, edo krog o rimia an daol,
pa nijas eur wenanenn e-barz ar gambr dre ar
prenestr digor.

— Demat, eme ar wenanenn, plijadur am eus
ouz da welout. An Dimezell Flemm a reer ac'ha-
noun, ha va micher a zo ober koar.

— Ha me a zo Lizig, merc'h ar gornandonez,
a respontas ar plac'hig.

— Deus eun deiz d'am gwelout, eme ar wena-
nenn. E-touez ar beler, e traon al liorz, eman va zi.

Hag hi kuit.




Bep gwech ma c'helle kaout eur pennadig am-
zer vak, ez ae Lizig e traon al liorz, e-touez ar
beler, hag eno chom o varvailhat gant he migno-
nez ar wenanenn. An dimezell Flemm a rôe d'ezi da
eva gliz-beure sukret gant mel, e-barz kalon eur
vleunienn. Ha me 'lavar, eur vignonez vat e oa, hag
e c'helled fiziout enni. Hep dale e vo gwelet.




Eun nebeut deiziou goude e voe dihunet Lizig gand eun trouzig e traon he gwele. Sellout a reas, ha petra welas ?... eul logodennig vihan, n'oa ket brasoc'h egeti.

— Me eo Lost-Hir, a wic'has al logodenn, o sevel eun tammig ar c'hantolor a oa ganti en he fao. Deus ganin, mar plij, rak va faotrig a zo klanv bras. Ha ne ouzon ket petra da ober evid e barea.



Lizig a ziskennas eus ar pod-sukr hag a yeas war-lerc'h an Itron Lost-Hir, he c'halon p lammat eun tammig en he bruched. Kaset e voe gand al logodenn betek eun toullig e traon ar voger. Neuze ez ejont a-hed eur riboul tenval, ken striz ma rankjont en em ruza. En diwez e voe digoret eun nor vihan gand al logodenn, ha Lizig a welas ... eur gambrig vrao ha dek gweleig enni.



En unan eus ar gweleou edo astennet eur pao-
trig-logod klanv.

— Sell 'ta, pegen disliv ez eo, eme ar vamm-lo-
godenn. O, m'em befe eun tammig fourmaj da rei
d'ezan ! War a lavar ar medisin, neuze e vefe
gwelloc'h dioustu. Hogen gwreg ar c'hoadour a la-
ka atao ar fourmaj en eur plad golôet, ha n'hel-
lomp ket e dapout. Marteze e c'hellfes rei skoa-
zell d'imp.

— Klask a rin, eme Lizig.

Hag ez eas d'he gwele adarre.




Antronoñ vintin, da darz an deiz, ez eas Lizig er-maez da gaout he mignonez ar wenanenn, da c'houlenñ ali diganti.

— Me 'oar petra ober, eme ar wenanenn, eur wech ma voe bet displeget d'ezi an dra. Mont a rin war bardell ar prenestr, ha neuze, pa vo ar wreg koz oc'h aoza lein, — ma ! gwelout a ri ar peñ a weli !



P'he devoe gwreg ar c'hoadour lakaet amann war ar bara ar mintin-se, ez eas d'ar ganastell da gemer ar fourmaj. Kerkent ha ma voe krog he dourn e plad ar fourmaj, e teuas an Dimezell Flemm, ha yao !... krak ! krak ! krak ! setu ar plad e bruzun war al leur-di.




M'he dije gouezet ar wreg koz pe dro a oa bet e'hoariet d'ezi, he dije dibabet eul lec'h gwelloc'h da lakaat ar fourmaj goude lein. Lezel a reas ar fourmaj dizolo ha dizifenn. ...Hag e-kreiz an noz, tiad an Itron Lost-Hir en e bez a zeuas war ar ganastell. Pebez kofad a rejont neuze ! Tam-mou bras a ziskolpjont diouz ar fourmaj da gas ganto beteg o zoull.




Ha pebez dremm chifet he devoe ar wreg pa gavas pezh a chome eus he fourmaj, antronoz ! E-pad an noz, pa voe kousket ar c'hoadour hag e wreg, e savas Lizig hag en em silas didrouz betek Mus, he mignonig klanv. Kalz gwelloc'h e oa, breman m'en doa debret fourmaj.



Diwar neuze ez eas Lizig da welout Mus bemnoz. Azeza a rae e-tal e wele, ha c'hoari pe gomz gantan. Ret e oa beza war evez koulskoude, gand aon na zihunje ar c'hoadour hag e wreg ha na zeujent da c'houzout.



Pa voe pareet Mus, mammig Lost-Hir a rôas
eur banvez-noz. Eur wastell he doa poazet, farset
gant tonenn kig moc'h ha fourmaj. Pa voe lonket
pep tra, e c'hoarias ar vugale a bep seurt c'hoa-
riou e kanastell ar c'hoadour. N'oa ket fur ke-
ment-se. Dihuna a reas ar c'hoadour. Ha petra
reas ?...




Al logod a skampas dioustu d'o gwele. N'oant ket bet, avat. tri munud e-barz o zoull, pa glevjont eun trouz, « klik ! », e penn ar riboul.

— O, Liz'ig kaez ! a c'harman an Itron Lost-Hir.

An tad a zeuas er-maez da welout petra a oa c'hoarvezet hag a voe distro raktal.

— Eun trap, emezan, a zo bet lakaet e penn ar riboul, hag aet eo war-eeun e-barz.

Sed aze nec'hamant d'al Lostou-Hir !



N'hellomp ket he lezel hec'h-unan-penn, eme an tad.

Gant Mus ha Ruff, e zaou vab brasa, ez eas betek an trap adarre. Kalonekaat a rejont Lizig, ha prometi d'ez i o skoazell. Neuze en em rôas ar bugelig da gousket. A-hed an noz e chomas an teir lodenn d'ober ged warni, ha, da darz an deiz edont eno c'hoaz, o klask an tu d'he zenna er-maez.



Pi-i-ip ! A daol trumm e tigoras an nor. Mus, a oa azezet war al leur-di a dec'has dre an toull er voger. E dad ha Ruff a lammas e-barz heuzou ar c'hoadour, a oa eno e-kichen. Ar c'hoadour a zeuas tre.

— Ma ! ma ! emezan, o tenna Lizig eus an trap, o welout laeron va' fourmaj out bet ? Diskouez d'in pelec'h eman o zoull-kuz dioustu !




Lizig, avat, ne felle ket d'ezi gwerza he mignoned.

— Ne lavarín d'eoc'h morse ! emezi en eur zifronka.

Neuze e voe lakaet gand ar c'hoadour e-barz ar voest kartons.

— Biken ne zeui er-maez, ken n'az pezo lavaret d'in ! ha n'ez pezo netra da zebri na da eva. Me a zesko d'it en em glevout gand al laeron-se !



Neuze e lakaas ar voest war eur stal, hag e krogas da gempenn e heuzou. Hogen n'en doa ket lakaet mat e vrec'h e-barz ar genta botez ma rankas he zenna en eur grial, ha... hop... hop... an diou logodenn a lammas er-maez. Eul lamm spon-tus e voe, ha koulskoude e kouezjont war o zreid hep droug,... ha kuit, prim evel eun tenn.




E-barz an toull e kavjont Mus ouz o gortoz.
Diviz a rejont kenetrezo da c'houzout petra da
ober.

— Krignat a rin ar gorden, eme Rufl.

— Diod ma 'z out, eme e dad, ha goude ne
c'hellimp ket sevel ar golo. Nann, ret eo d'imp
toulla en unan eus kosteziou ar voest, evit ma
c'hello Lizig en em sila er-maez.



Dre laer, e-kreiz an noz, e krapas an Aotrou
Lost-Hir hag e zaou vab war ar stal ma edo ar
voest. Hag int kerkent da grignat. Tenn al la-
bour, hogen krignat a rejont. peb unan d'e dro,
hag en diwez e voe an toull bras a-walc'h, ha Lizig
en em silas er-maez. Penaos, avat, diskenn eus ar
stal ? N'he doa ket krabanou lemm evel al logod.



Eur menoz a darzas e penn Ruff. Gwelet en
doa loerou ar wreg, a oa bet lakaet war eur gador.
Freuza a reas unan anezo, hag e tennas diouti eun
neudenn a stagas ouz eun tach. Skoulmou a reas
enni. Neuze e c'hellas Lizig diskenn, o lakaat he
zreid war ar skoulmou. Ha kuit da di al Lostou-
Hir.



Al Lostou-Hir a stlakas o daouarn ouz he gwelout. Yod a oa bet aozet gand an Itron Lost-Hir, ha mat e voe kavet gant Lizig. N'he doa tanvaet tamm e-pad an deiz ! Laouen meurbet e voe an holl o klevout an dro gamm a oa bet e'hoariet d'ar e'headour. Hogen, pa welas Lizig an holl logod-se ken eürus en o zi, holl a-gevret, e sonjas en he mamm, hag e stagas da ouela.



— Breman, eme an Aotrou Lost-Hir, me az kaso warc'hoaz da di va e'henderv Fri-Tougn, al logodenn-vors. Hep mar ebet, hennez a gavo d'it da vamm.

Antronoz vintin, goude beza poket d'an Itron Lost-Hir ha d'he bugale, e kemeras an tad ha Lizig penn o hent. Hir e oa. Hogen an heol a lurgerne ken madelezus a-zioc'h o fenn, ha ken brao e oa ar roz-aer hag ar glizin !



Nebeut goude kreisteiz, e weljont dirazo ti ar
e'henderv Fri-Tougn, e-kreiz eur park ed. Hag i
d'ober hent dre ar soul, ... a oa evel gwez da Lizig.


Pa zegouezjont, edo an Aotrou Fri-Tougn
e-tal an nor, o sach a war e gorn.

— Ma, biskoaz kemend-all ! emezan en eur
stlaka e zaouarn.

An nor a zigoras neuze, ha...



Dek logodennig-vors a reas eul lamm er-maez da gaout ar re a zeue d'o gwelout. Hag an Itron Fri-Tougn en em ziskouezas ivez e toull an nor. Kement a draou o doa da lavarout an eil d'egile ! Ne oant ket evit paouez ! Evel just e voe pedet tad al Lostou-Hir da verenni, ha neuze e vije kendalc'het gant ar gaoz.



— D'ar mare mat e tegouezez, eme an Aotrou Fri-Tough, tra m'edo an daou ozac'h o vutuni goude merenn. Mont a ran d'ar c'hoad, ar sizun a zeu, da baea va gouel-Mikael da roue ar Gornandoned. Hennez a ouezo hiroc'h egedoun diwarbenn an dra-se. Anaout a ra an holl gornandonezed. Lez ar plac'hig vihan aman, ha me he c'haso gannin d'e gaout.

Neuze ez eas an Aotrou Lost-Hir d'ar gêr, ha Lizig hag ar re all a hejas o dourn d'ezan keit ha ma c'helljont e welout.



An traou, avat, a drôas en eun doare all. Kle-
vit eta. Eun devez bennak goude, ez eas ar Friou-
Tougn d'ar park da glask boued. Lizig ha daou
eus ar vugale, Kign ha Dantig-Lemm, a chomas da
ziwall an ti. Hogen, ret e voe d'ezo chom er-maez,
rak an tad en doa prennet an nor.

— N'em eus ket ezomm, emezan, da gaout va
arrebeuri freuzet ganeoc'h, ha pep tra stlabezet
e pep korn.



Goude beza c'hoariet eur pennad, e pignas ar
vugale betek krec'h eur grugellig da welout ar
vro tro-war-dro. Eus eun toull graet en douar e
teue koabrennou stank a voged.

— Sell 'ta hor siminal ! eme Gign. Greomp
eun toull aman da ziskenn en hon ti ! Pebez tro
vrao da c'hoari da dad ha da vamm pa vint distro !



Lizig a gave d'ezi e oa fall meurbet ober an dra-se. Kign, avat, ha Dantig-Lemm ne rejont forz, hag e stagjont da doulla ken e lamme ar mouded dreist diskouarn Lizig.

— Emaomp ganti ! a hopas Kign, ha raktal e kouezjont o-daou, gand eul lamm-chouk-e-benn, n'eo ket e-barz o zi, hogen e-barz ti ar c'hoz !



Va Doue! na pebez penn tenval! Edo azezet o
c'hlaourenni e-touez he fodou hag he c'hastolo-
dennou leun a velc'houd sall hag a vorzedou
c'houiled o virvi. Ha pebez daoulagad spontus!
Ha pebez skilfou!



A drugarez Doue, e oa eun nor damzigor. A-barz ma c'hellas ar c'hoz sevel war he zreid, e voent kuit en eur wic'hal e-giz moc'h bihan. N'oa ket brao redek dre ar ribouliou-se, du-pod, o vont a-stok ouz kement moger oa, gand an aneval spontus-se war o lerc'h. Neuze e weljont goulou an deiz. Eun nebeut lammou c'hoaz, ha setu i er-maez er sklerijenn.



Ar c'hoz, avat, ne ehanas ket. Redek a reas war o lerc'h endra c'hellas tro-war-dro d'an du-riadenn. Lizig a yeas da guzat a-drenv eur bodad deliou gand aon beza gwelet gand ar c'hoz. A daol trumm, eur wennili a dremenas a-rez an douar en eur grial a-zioc'h pennou an diou logodenn. Peb unan a grogas e treid ar wennili... hag i dibradet raktal.

— Kenavo, Lizig, lavar da vamm pelec'h omp aet ! eme Zantig-Lemm.



O c'hervel e-giz-se en doa Dantig-Lemm diskuliet d'ar c'hoz e oa Lizig eno. Ar paour kaez bugel a chomas azezet en eur grena. Va Doue ! Setu ma teuas ar c'hoz war-eeun etrezek he zoullkuz. Teurel a reas an deliou a-gostez, hag e krogas en he dourn.

— Pebez matezig vrag am eus kavet aman ! a c'harmas ar c'hoz.

Hag e sachas Lizig ganti betek he zoull. Neuze e vorailhas mat an nor, hag e lakaas eur valaenn vras etre daouarn Lizig.



— Skub, eme ar c'hoz en eur c'hrozmolat.
Skub !

Ha bemdez diwar neuze e rankas ar bugel
paour skuba ar ribouliou hir tenval-se. Ha bez' e
oa anezo ! Bemdez ez ae ar c'hoz da welout pe-
naos oa bet graet al labour. N'helle ket Lizig
tec'hout, rak an nor a veze morailhet dalc'hmat,
hag an alc'houez a oa gand ar c'hoz en he godell.



Eur riboul a zigore war ribl an dour. Eno e ka-
re Lizig chom, alies e-pad euriou penn-da-benn, o
c'hedal unan bennak da zont war he skoazell.
N'helle ket tec'hout dre eno kennebeut. Rak uhel
e oa ar mogerioù tro-dro, hag en traon ne oa netra
nemet dour.



Eun deiz ma oa a-zevri o skuba gand ar va-laenn bounner, e klevas eur vouez e'hoapaus:

— Aha ! an dimezellig, merc'h ar gornando-nez, aet da vatez ! Diwall da louza da zaouarnig brao !

Lizig a drôas he fenn. En eun toull er voger, edo azezet eur e'horrig divalo, o tenna e deod d'ezi.



— Kae kuit, korrig divalo ! a e'haras Lizig
gant kounnar.

Sevel a reas he balaenn, ha dao war benn ar
e'horrig.

— O! o! o! mammig ker, a youc'has ar e'horrig.

Neuze e kouezas war e gein, hag ez eas diwar
wel raktal.



Lizig a gendalc'has da skuba. Pe zegouezas e-kichen an dour, e welas eul loen iskis.

— Eur souezenn all ! emezi. Petra zeuio war-lerc'h an dra-man ?

— Arabat d'it beza nec'het, eme al loen. Jobig Lamm-en-Dour eo va ano. Gwelet em eus ar e'hoz o kregi ennout. Ha deut oun d'az savetei. F'noz e teuin aman gant bag mab roue ar raned d'az kerc'hat.


Hag hep gortoz ar respont e lammas e-barz an dour, hag e neuias kuit.



E-pad an noz, pa voe kousket ar c'hoz, Lizig a savas diouz he gwele, ha kuit didrouz da ribl an dour. Jobig a oa eno ouz he gortoz en eur vag-dre-lien.

— Deus e-barz, emezan. Deus e bag hor roue, E Veurdez Lagad-Teo XIII !


Lizig a bignas er vag, ha flourik kaer en noz sioul, ez ejont dre douez ar raoskl hag al lugustr.



Jobig a gasas ar vag en eur ganol striz etre ar raoskl. Eno, e penn ar strizenn, e oa dor eur c'hastell sklerijennet kaer meurbet.

— Setu aman palez roue ar raned, eme Jobig.

Eul lakez koz en em ziskouezas, eur pikol letern en e zourn. Gand eur gorden a voe stlapet d'ezan gant Jobig e stagas ar vag ouz an aod, hag e teujont er-maez.



— Ma ! hounnez eo neuze merc'h ar gornan-
donez ? eme al lakez, rok a-walc'h. Ne vefe ket la-
varet ! P'edon yaouank, holl verc'hed ar c'hornan-
donezed a zouge diouaskell hag eur steredenn !
Giziuou iskis a zo breman ! m'hen tou ! giziuou is-
kis !.

Hag en eur c'hrozmolat etre e zent e tiskoue-
zas an hent d'ezo.



Na bravat taolenn dirak daoulagad Lizig !
Ouz he zreid : eur parkad deliou lugustr beuzet
en eur sklerijenn vras. Eur strollad sonerien a oa
o seni war violonsou hag o c'houeza e binviou
kouevr, ha peder nadoz-aer a oa oc'h ober dansou
skanv. C'houiled, razed, raned ha glazarded a oa
bet pedet da zont.



— Sell ! eme Jobig, er gador-se eman ar roue. Komzet em eus outan diwar da benn.

Va Doue ! ruz e oa Lizig paour gand ar vez o treuzi al leurenn ledan-se, hag an holl dud vras-se o tispourbella o daoulagad da sellout outi. Dizamet e voe p'en em gavas dirag ar roue !



— Setu aman ar plac'hig, eme Jobig.

Hag e reas eur stouadenn, ha kuit.

Ar Baron Kwag, ministr E Veurdez, a ginnigas, hegarat meurbet, e gador da Lizig, hag houman a zisplegas istor he buhez. Karout a rafe, emezi, mont da gaout roue ar Gornandoned.

Kofeg ha Lagadeg, an daou brins, mibien ar roue, a selaoue gand evez.



— Ma ! eme ar roue, degouezet mat out ! E
Veurdez Hir-e-Varo, roue ar Gornandoned, a zo
mignon bras d'in-me, hag e tle dont d'am gwelout
a-benn tri devez. N'edos ket e gortoz a gement-se,
moarvat ?

E-keit-se ez echue ar gouel, hag an holl gou-
vidi a zeuas an eil war-lerc'h egile da starda e
zourn d'ar roue, en eur stoui brao meurbet di-
razan.



Pa voe aet kuit an holl, e lavaras ar roue da Lizig :

— Skriv eul lizer da genta d'an Aotrou ha d'an Itron Fri-Tougn, da rei kelou d'ezo eus o mibien hag ae'hanout.

Ar prins Kofeg a zegasas eun daol-skriva. Pa voe echu al lizer, eur mevel a yeas d'e gas. Ha Lizig a bignas en he gwele : eur gwele a-istribilh etre ar c'horz.



Na sioul e oa eno ! C'houez vat a save diouz ar bleuniou, hiboudi a rae ar raoskl, hag horellet e voe goustadik gand aezenn an noz. Hag e lintre ar stered, evel o lavarout : « Da welout a reomp holl, Lizig vihan ! » Kousket a reas hep dale, hag e hunvreas e teue he mamm en eur gana d'he lus-kellat.

Antronoz, abred, e oa he mignon Kofeg eno d'he dihuni.

— Ha te a garfe dont d'ober eun dro ? emezan.



Goude lein ez ejont o-daou da vale. Kofeg a felle d'ezan diskouez da Lizig rouantelez e dad. Da genta ez ejont en eur skol. D'ober enor d'ezi e voe lakaet ar vugale da gana kanaouennou brao.

Ar prins Kofeg a ganas ivez, rak anavezout a rae holl ganaouennou ar vro.



Starda o dourn d'ar mestr-skol ha d'ar vugale a rejont, ha kendere'hel gand o hent. E barr eur raosklenn edo eur ran. Eur gorden hir a oa istribilhet a-zioc'h an dour, gand eur maen stag ouz penn ar gorden.

— Eun tour-ged eo, eme Gofeg. Pa wel ar ran a zo aze war-laez eur gerc'heiz pe eur c'houibon o tostaat, e tenn war ar gorden. Neuze e kouez ar maen e-barz an dour, hag ar raned a ya da guzat.



Eur pennad hir a hent o doa graet, pa weljont
moged o tont eus eun toull striz e-mesk ar c'horz.
Redek a rejont da welout. Ha petra weljont ?...
Sellit ouz ar bajenn a zeu : na pebez taolenn
spontus !



Eno edo azezet eur sorserez euzus divalo,
bleo gwenn hir d'ezi. Edo o lakaat da virvi war an
tan soubenn graet gant kegid kontammus. Daoula-
gad a oa en he fenn, gouest da lakaat spouron en-
noc'h ! Ha daouarn, evel loaiou-pod, gant pevar
biz e-lec'h pemp ! E-tal he zreid, edo azezet... ar
c'horrig hon eus gwelet e ti ar c'hoz.



— Mamm ! mamm ! setu hi aman ! Deus !
deus ! a youe'has ar e'horrig, rak ar sorserez a oa
e vamm.

Lizig ha Kofeg a drôas kein hag a dec'has
dillo. Hogen ar sorserez a e'helle astenn he brec'h
keit ha ma kare. Paket e voe Lizig etre ar pevar
biz spontus. ha sachet e-barz an toull. Kofeg, al
loenig kalonek, a oa chomet a-drenv ar raoskl, da
welout petra a vije e'hoarvezet.



— Evel-se, eme ar sorserez, te eo ar bugel he deus graet droug d'am mab ! Gwaz a se evidout ! Talvezet e vo d'it ! O ! o ! a youc'has : « Hoskus-Pokus-Glesker-Kwak ! »

Ha setu Lizig kaez aet da ran ! Lakaet e voe gand ar sorserez en eun armel.



Kofeg a redas, o lammat tri metrad bep tro,
da gonta an doareou d'e dad. Gwall strafuilhet e
voe ar roue.

— O ! o ! a c'harmas, bet eo ar sorserez-se o
c'hoari fall adarre ! Ne bado ket pell, avat !

Hag e lakaas e gurunenn war e benn hag e
c'halvas e dabouliner.



An tabouliner a voe rôet urz d'ezan dastum
an holl raned. Bom ! bom ! bom ! strakal a rae an
daboulin dre ar raoskl, h'a war-c'horre an dour.
A bep tu e terede tud bro ar raned. Ar ministr
hag ar jeneral Jakedenn-C'hlas a voe ar genta da
zont, na petra 'ta. Pa voe tavet an holl, e savas
ar roue war e gador.



— Va zud karet, emezan, ha c'houi a fell
d'eoc'h beza trôet holl e c'houiled-du ?

— Na-a-a-a-ann, a c'hrakas an holl raned.

— Ma, a gendalc'has ar roue, neuze ez aimp,
dindan renadur hor jeneral bras Jakedenn-C'hlas,
da baka ar sorserez henoz ha da savetei hor mi-
gnonez Lizig.



D'an noz, an holl raned, ar jeneral Jakedenn-C'hlas en o fenn, en em silas betek lochenn ar sorserez hag en em zastumas tro-dro.

— Ma c'hellfen tapout he gwialenn ! eme Gofeg, izel. Ez an da glask !

Kuzat a reas e-mesk ar c'horz, hag ez eas betek ti ar sorserez. Gand evez, e taolas eur sell etre ar c'horzennou. E galonig ran a rae lammou bras. Eno edo kousket ar sorserez, astennet war eur gwis-kad geot ha raoskl, he bugel ganti en he c'hichen.



Edo he gwialemm en he dourn. Didrouz kaer ez astennas Kofeg e zourn hag e stokas outi. En eur ober se e tistagas ar geriou en doa klevet ar sorserez o lavarout : « Hoskus-Pokus-Glesker-Kwak ! » Ha setu ar sorserez aet da ran ! Kofeg a laoskas eur c'harmadenn skiltr, hag a bep tu e teredas ar raned.



Trec'het e voe buan ar sorserez neuze. Tra m'edo ar raned o staga he daouarn hag he daoudroad, e voe trôet ar c'horrig da ran ivez gant Kofeg. Neuze e tigoras an armel da Lizig, e stokas outi gand ar wialenn, hag e c'harmas : « Hoskus-Pokus-Lizig-Kwak ! » Ha setu ar plac'hig ~~kæ~~er dirazan ken brao ha kent.



Ar sorserez hag he bugel a voe sachet kuit neuze. Hogen, eur wech degouezet e-touez ar raoskl, Lizig a gemeras dre laer ar wialenn digant Kofeg, he zorras e tammou hag he stlapas en dour.

— Evel-se, emezi, ne vo mui graet a zroug gand ar c'hoz tra-man.

An daou brizoniad a voe kaset neuze da balez ar roue, ha lakaet en toull-bac'h evid an noz.



Antronoz vintin e voent kaset dirag ar roue.
Ar roue a sellas outo, e zaoulagad bras-bourbell
leun a gounnar. Urz a rôas ma vije galvet an daou
grenva eus raned ar rouantelez, hag e lavaras :

--- Krougit an amprevan-man ouz an uhela
korzenn a c'hellot da gavout. Evid ar paotr bihan,
lezet e vo gantan e vuhez, hogen deski a raimp
d'ezan mont eeun !



Tra m'edo an-daou e'hlesker, avat, o vont
kuit gand ar vamm, setu ma redas ar paotrig be-
tek Lizig, daelou tomm o ruilha war e zivoc'h.

— O ! lezit he buhez gant va mamm, m'ho
ped !

Hec'h aspedi a rae :

— Karout a ran kement va mamm ! Hag e
vin eur bugel fur atao, atao ! Goulennit buhez va
mamm digand ar roue, mar plij !



Pa welas Lizig e kare ar c'hrouadurig diva-
lo-se kement e vamm, — evel end-eeun ma kare
hi he mamm, — e taoulinas dirag ar roue, o c'hou-
lenn e bardon.

— Kredi a ran ar pezh a lavar ar bugel-man,
emezi. N'int ket ken fall-se. Fizians am eus na
vo mui graet droug ganto.



Eul luc'hedenn a darzas... ha... trôet e voe
ar sorserez hag he mab e daou zen, ar vrava hoc'h
eus gwelet biskoaz ; eun itron gaer o vouse'hoar-
zin hag eur paotrig koant !

— Penaos, eme ar roue gant souez, c'houi eo
Itron ar Geuniou hag he bugel !

— Me eo, eme an itron, o stoui he fenn.



Neuze e tisplegas petra a oa e'hoarvezet ganti.

— Eun deiz, emezi, e kemeris da vevel eur e'horrig divalo. Ra n'em bije morse kemeret hennez ! Kemmeska a reas eul louzaouenn gant hon evaj, hag e voemp trôet neuze da gorrigez euzus. « Netra n'hellou rei d'eoc'h en-dro ho furm genta, nemet kaout a rafec'h unan bennak en devo truez ouzoc'h ; ha ne vo ket aes da gavout gand ar pennou divalo-se ! Ha ! ha ! » Evel-se e komzas ar e'horrig.



— En eur ober goap d'in e lakaas ar c'horrig fall eur melezour dindan va fri, eme Itron ar Geuniou, ha chom a ris strafuilhet. Neuze e rôas d'in eur wialenn, o lavarout: « Gand ar wialenn-se e c'hellot lakaat re all da veza ken divalo ha c'houi. Evel-se n'ho pezo ket mez dirazo! » Hag hen kuit. O ! pegen reuzeudik hag enkrezet e voen neuze ! Va c'halon a oa deut da veza fall, ha kalz droug am cus graet abaoe.



— Breman, avat, oun bet saveteet ganeoc'h,
peogwir hoc'h eus bet truez ouzin, a lavaras an
itron en eur echui. Eur bugel mat oc'h.

War se, e stardas Itron ar Geuniou o dourn
d'an holl, hag ez eas kuit gant he bugel, eürus bras.



Antronoz e voe kempennet pep tra evit degermer roue ar Gornandoned. Gwisket he doa Lizig eur vrozig kaer liou ar bleuniou-dour. Ha deiz ar gouel, d'ar mintin, e voe kaset gand an daou brins da di perukenner ar gornandoned, e-touez ar geot war ribl an dour. Pa zegouezjont, edo azezet oc'h aveli e benn dirag e di.



Tra m'edo an daou brins o c'hoari e-mesk ar
geot, e voe trouc'het ha kempennet he bleo da Li-
zig hervez giz nevez ar c'hornandonezed. Neuze
e wiskas he broz nevez, ha war he bleo e voe la-
kaet eur gurunenn a vleunion gleiz. Eun estlamm
e oa he gwelout neuze.



Goude kreisteiz e tegouezas ar roue Hir-e-Varo, azezet war Berig, e gudon. Degemeret e voe gand ar roue, ar ministr hag ar jeneral. Lizig hag ar brinsed a voe degaset dirazan, hag e c'hrakas ar raned a-bouez-penn :

— Bevet ar roue Hir-e-Varo ! Bevet ar roue Hir-e-Varo !



Lizig a c'houlennas dioustu ha gouzout a rae
ar roue Hir-e-Varo eun dra bennak diwar-benn he
mamm garet.

— Gortoz, eme ar roue, ne ouzon ket an holl
draou-se dre envor ! Ret e vo d'in goulenn digant
va sekretour da genta. Deus ganin pa zistrôin
d'ar c'hoad. Krepv a-walc'h eo Perig d'hon dougen
hon-daou.



Eun hanter eur goude-se e voe ar gouel en e vrava. Da genta e voe lakaet ar c'hezeg da lammat. Lagadeg, mab ar roue, a gouezas diwar le vare'h war e benn. Hogen ne reas forz : boazet e oa.



Da c'houde e voe eur redadeg-kezeg war an dour. Pep loen en doa da gas war e lerc'h eul loazour ma oa pignet warni eur glesker krog er ranjenn. Diaes e oa chom evel-se war eur vleunienn. Beb ar mare e veze gwelet eur glesker oc'h ober toutig-penn en dour. Neuze n'en doa mui ar gwir da gendere'hel, evel just.



Pa voe echu ar redadegou, an holl a davas, ha
roue ar raned a savas e vouez :

— Sujidi garet, emezan, da genver ar gouel-
man ez anvan hor mignonez Lizig da Brinsez ar
Raned, hag e rôan d’ezi an ano a Brinsez an Dour.

— A zo mat ! a youc’has ar raned. Neuze e
voe pedet Lizig da rei ar priziou d’ar c’houneze-
rien. Pep gounezer a voe lakaet eun dro-c’hou-
zoug bleuniou en e gere’henn.



Neuze e youc'has paotred ar redadegou holl
a-gevret :

— Hourra ! kwak ! kwak ! Buhez hir da Brin-
sezig an Dour !

Ar gleskered a zansas dourn-ouz-dourn en-dro
d'ezi, tra ma selle an daou roue hag ar ministr ouz
an abadenn en eur vouse'hoarzin.




Goude e teuas ar gauerien. Kana a rejont
kan broadel ar gornandoned hag hini ar raned.
Hogen, ne oa ket echu ganto ar c'homzou-man :

« N'hon eus ket aon dirak netra ! »

ma reas maen eun tour-ged eun trouz spontus o
koueza en dour. An holl raned a dec'has. Ne cho-
mas war an dachenn nemet Lizig ha roue ar gor-
nandoned.



— Ar c'houibon ! ar c'houibon ! a c'hrakas an
holl raned spouronet, ha... plam ! plam ! plam !
setu an holl, raned, roue, jeneral, ministr e strad
an dour. Kerkent e tiskennas eur c'houibon ken
bras ma c'holôe ar foenneg gant he skeud. Hogen
ne chome netra da zebri. Ne oa den eno nemet ar
roue ha Lizig.



Ar roue Hir-e-Varo a sellas ouz ar c'houibon,
droug ennan.

— Penaos ? a youe'has. Te adarre ! Pet
gwech em eus difennet ouzit dont war-dro rouan-
telez va mignon Lagad-Teo ? Poent eo echui ganit.

Hag e stlakas ar roue e zaou zourn. Dioustu,
kornandoned en em ziskouezas : eus an oabl, a-vesk
ar raoskl hag ar c'horz e teujont a-denn-askell.



— Stagit hounnez ha kasit hi d'ar c'hoad! eme ar roue. Warc'hoaz d'an abardaez e vo barnet di-razoun. Lavarit d'ar gornandoned a zo eno kem-penn pep tra.

Ar gornandoned neuze a dennas o gouriziou, hag o stagas en-dro d'ar c'houibon evel kerdin. Ha kuit ganti war-du ar c'hoad.



Pa voe aet kuit ar c'houibon, Lagad-Teo a savas e benn gand evez a-zioc'h an dour.

— Aet eo kuit ? emezan goustadik.

Ar roue Hir-e-Varo a stouas e benn. Neuze e voe gwelet pennou ar raned all, hag... hop ! hop ! lammat a rejont eus an dour. Ar gouel la gendalc'has, ha soniou laouen a voe kanet da heja ar sonjou fall.



D'an noz e voe enaouet gouleier war an dour.
C'houec'h kant prenv-lugernus a oa bet paeet
gand ar roue evid en em renka e stumm bleuniou
kaer, a voe skeudennet en dour. Eur strollad so-
nerien a oa o seni toniou brao e bag ar roue. Edo
ar roue hag e dud azezet war ribl an dour. An di-
mezell Naer a oa eno ivez.



Neuze e voe bravoc'h c'hoaz ar gouel : ar
prenved-lugernus en em renkas e stumm al lize-
rennou H ha L, da lavarout eo, Hir-e-Varo ha La-
gad-Teo. Neuze e tregernas digoradur ar c'hoari-
gan: « **Cavalleria Gleskeriana** » war-c'horre an
dour.



Diwezat en abardaez antronoz, e kimiadas
roue ar Gornandoned ha Lizig diouz ar raned.
Daelou tomm a skuilhas, rak karout mat a rae ar
raned. Lizig hag an daou brins en em vriatas, ha
ret e voe d'ezi prometi dont en-dro p'he dije kavet
he mamm.



Neuze e pignas ar roue Hir-e-Varo war gein
ar gudon, o lakaat Lizig dirazan, hag e savjont
uhel en oabl. Hu! yen e oa eno. Krena a rae Lizig
gand ar riou. Ar roue Hir-e-Varo, avat, a dennas e
vantell d'he lakaat en-dro d'ezi. Neuze e tigoras
Lizig he daoulagad. Na pebez taolenn gaer ! Pell,
pell dindani edo astennet an douar, ha war an
dremmwel e oa an heol o lugerni evel an aour, hag
o teurel bannou ruz skedus etre ar c'houmoul.



A-greiz-holl e klevas eun trouz en a-drenv. Bez' e oa Oberon, roue an Oabl, war e vare'h gwenn. Klevet en doa gand ar gornandoned ar pez a oa c'hoarvezet gand ar c'houibon, hag e felle d'ezan mont d'ar varn. O veza ma 'z aent d'an hevelep lec'h, e reas hent ganto. Ne oa ket kuzet an heol pa zegouezjont o-zri e-barz ar c'hoad.



Pep tra a oa bet aozet a-benn ar varn. Ar roue hag ar re all a azezas e traon eur wezenn vras, ha degaset e voe ar c'houibon dirazo, chadennet mat. Pigos-Lemm, ar gaouenn, 'a voe an tamallour, hag ar c'hornandon Dourn-Mibin en devoe da gemer dre skrid kement a vije lavaret.

— C'houibon, eme ar gaouenn, tamallet eo d'eoc'h beza debret ha kinniget debri tud eur vro n'o doa graet droug ebet d'eoc'h. Petra hoc'h eus da lavarout ?



Neuze e teuas tro an Aotrou Louarn, difennour ar c'houibon.

— Hoc'h Uhelled, emezan d'ar roue, me a gav d'in e ve mat kaout truez ouz ar paour kaez aneval-man. Ret eo d'ezi debri raned, pe mervel gand an naon. Hogen, bep gwech ma tebr eur ran, e tarz he c'halon gand an druez. Sonjit, Aotrou Roue, pebez anken ! Rankout beza kriz pa vez tener ho kalon ! Ouspenn, a gendalc'has, eur mousc'hoarz moan war e vuzell, an Aotrou Pigos-Lemm e-unan ne ra ket fac eur wech an amzer war eur ran.



Ar gaouenn a zeuas ruz gand ar gounnar.
Den, avat, ne welas seurt, abalamour d'he flunv.
Hag ar Roue a lavaras :

— A zo gwir marteze, hogen an hini kablus a
ouie mat e ranke lezel e peoc'h va mignon Lagad-
Teo. Ha setu perak. Pell amzer 'zo e tibabis da
veza gwreg d'in eur brinsez eus eur vro a-bell.
Dek eus uhela ha speredeka kornandoned va rouan-
telez a yeas d'he c'herc'hat war va bag-roue.



— War o distro, o tremen dre vro va mignon
ker Lagad-Teo, e voe trôet ar vag war he genou
gand eur beked diskiant. Dispont kaer, ha war
var beza lonket gand al loen euzus-se, ez eas ra-
ned Lagad-Teo war-neunv beteg eno. Savetei a re-
jont an holl, ha dont a-benn zoken da drei ar vag
adarre.




— Siouaz ! a gendalc'has ar roue, dek glesker a gollas o buhez etre javedou kriz ar pesk. Neuze e touis e vije difennet hiviziken bro Lagad-Teo gand ar gornandoned. Hag ar c'houibon 'a oar kement-se.

Ar roue e savas, hag o krena gand ar gounnar, e youc'has :

— En ano va gwreg a zo maro, e varnan ar c'houibon da veza krouget dre he zreid ouz an uhela gwezenn.




Den ebet ne rannas grik o klevout ar c'hom-
zou spontus-se. Krena a rae peb unan. Kaset e voe
ar c'houibon beteg an uhela gwezenn, er c'hoad.
Eur gorden hir a voe staget en-dro d'he zreid, hag
ar gazeg-koad a gemeras eur gorden en he beg d'he
c'has dreist eur skourr. An demm neuze a savas ar
c'houibon, hag ar gorden a voe staget ouz eur skour-
rig izel.



O, na spontus e oa gwelout al labous bras is-tribilhet eno, o vransellat, hag oc'h en em zifreta ken na goueze ar plumv diouz e ziouskell. Ha ret e vije d'ar c'houibon chom eno, dindan an avel hag ar glao, ha mervel gand an naon ?

— Nann ! nann ! a sonjas Lizig, lezet e vo da vont kuit, n'eus forz petra a c'hoarvezo !

Hogen ne lavaras netra.



Ar roue a gasas Lizig en e balez. Ne oa dor ar palez nemet eun toull etre gwrizioù eun dervenn goz. Hogen, na pegen kaer e oa e-barz ! Mont a rejont dre salioù ha salioù betek bureo Sekretour Meur ar Stad. Ar roue a lavaras eun dra bennak d'ezan, ha setu hen o klask, o klask en e levrioù teo. Erfin e lavaras :

— Setu aman eun dra bennak diwar-benn eur gornandonez anvet Mirabilis, a chome en dervenn niverenn 20, en eil forc'h.




— Hogen kuitaet he deus ar c'hoad pell 'zo da glask he bugel, ha n'eo bet gwelet gant den ebet abaoe.

Tost e voe Lizig da ouela o klevout se. Nemet ar roue, emichans, a rofe d'ezi e skoazell. Antro-
noz vintin ez eas ar roue beteg an dervenn nive-
renn 20 da welout, hag anavezout a reas Lizig he
zi dioustu.



Goude, avat, e teuas sonj d'ezi eus ar c'houibon. E-kreiz an deiz, e-pad m'edo ar gornandoned o kousket, e laeras Lizig unan eus goafiou soudarded ar gornandoned, hag ez eas betek gwezenn ar c'houibon. Gant beg ar goaf e tistardas ar skoulm, ken na zeuas laosk. Ar c'houibon a gouezas d'an douar, hep kaout re a zroug koulskoude.




— Ha c'houi a zebro ar paour kaez raned adar-
re ? a c'houlennas Lizig.

— Biken, a respontas ar c'houibon ; ha ma
tistagez va zreid ivez, ez in dioustu da glask da
vamm.

Lizig a zistagas treid ar c'houibon, hag hou-
man a nijas kuit raktal. En abardaez-se, avat, ne
grede ket Lizig sellout eeun e daoulagad ar roue
Hir-e-Varo.



Souezet kenan e voe ar roue pa zeuas eur mevel da lavarout d'ezan e oa aet kuit ar c'houi-bon. Skei a reas war an daol gand e zourn kloz, o lavarout e oa « trubarderez ». Lizig a ruzias gand ar vez, rak madelezes oa bet ar roue Hir-e-Varo en he c'henver. Spi he doa evelato na vije dizo-lôet netra gantan.



Meur a sizun a dremenas, hag e kroge Lizig da gredi n'he dije ket dale'het ar c'houibon d'he ger. Eun deiz, avat, m'edo hi o vale gand eur c'hornandon, e tiskennas ar c'houibon trumm dirazo.

— Penaos e kredez en em ziskouez dirazoun aman ? eme ar c'hornandon. En arvar koll da vuhez emañ.


Ar c'houibon a respontas :

.. — Evid ar brinsezig eo oun deut.

Hag e komzas evel-hen :



— Eun nebeut leoiou ac’han, e-kichen eur parkad bras a ed, em eus gwelet eur gornandonez. Edo o c’houleunn ouz diou logodennig-vors ha gwelet o doa he bugel. Ar mors bihan a respontas ya, ha neuze e lavarjont d’ezi eun dra bennak diwarbenn eur c’hoz hag eur wennili, n’em eus ket gellet kompren petra. Rak ret e oa d’in chom kuzet.



— O, va mamm eo, va mammig karet ! a c'har-mas Lizig. Hag an diou logodennig-vors-se a oa Kign ha Dantig-Lemm ! Diodez ma 'z out, perak n'ec'h eus ket lavaret d'ezo edon aman ? M'ez pi-je bet diousskouarn, em bije sachet warno !

— Ma, eme ar c'houibon, ne ouien ket pe e oa da vamm pe ne oa ket, ha ne felle ket d'in la-kaat en aner levenez en he c'halon. Hogen, deus. Me az kaso beteg enni.

Hag e kemeras Lizig en he beg gand evez, hag he lakaas war he c'hein.



O nijal pe o vale e tegouezas ar c'houibon er park. Park an Aotrou Fri-Tougn e oa ! Eno end-eeun e oa e di. Ha piou a oa ázet, o lenva hag 'o tifronka e-tal an nor ?... Mamm Lizig !

— O, o, a hirvoude ar gornandonez kaez, pelec'h eman va bugel Lizig ? O ma oufen pelec'h eman ? Mervel a rin gand ar glac'har !

— Mamm ! mamm ! aman emañ ! aman eman Lizig ! a c'harmas Lizig neuze.



Ar gornandonez a reas eul lamml. N'oa ket evit kredi ar pezh a wele. Neuze e redas betek Lizig en eur grial. He c'hemerout a reas diwar gein ar c'houibon, hag he briata, o rei d'ezi a bep seurt anioiu c'houek.

— O mamm ! pardon ! a lavare Lizig dre he daelou. Ne rin mui biken, ne nij...

Fellout a rae d'ezi lavarout : « Ne nijin mui biken kuit », hogen sonj a zeuas d'ezi n'he doa ket mui a eskell, hag e stagas da ouela dourek.



Ar vamm he c'hasas d'an ti. Pebez souez d'ar
Friou-Tougn ! Laouen meurbet e voe Kign ha
Dantig-Lemm dreist-holl. Ar c'houibon, avat,
n'hellas ket dont e-barz, re hir e oa he divesker !
Neuze ar vugale a zansas en-dro d'ezi evit he freal-
zi. Ha ne zebras hini ebet anezo.



E-keit-se e tislepe an Itron Fri-Tougn ke-
lou glae'harus meurbet. Ar c'hoadour en doa pre-
net eur pikol kaz du, hag eun deiz, ma oa aet an
Aotrou Fri-Tougn da welout al Lostou-Hir, ar re-
man a oa aet kuit.

— Marteze int bet debret holl gand ar c'haz !
emezi en eur huanadi.



Lizig hag he mamm a zistrôas d'ar c'hoad
kerkent ha ma c'helljont. Da genta ez ejont da
gacut ar roue. Heman a reas d'ezo eun degemer
kalonek tre. Pardonni a reas da Lizig ar pezh he doa
græet. Hogen pa glevas ano eus ar c'hoadour fal-
lakh hag e wreg, e rôas urz da c'hervel holl loened
ar c'hoad a-gevret.



Hag i ha mont, peb unan anezo ! An arz, ar
e'haro, an houe'h-gouez, al louarn, ha redek war-
du ti ar e'hoadour d'an daoulamm. Ha kaset e
voent er-maez, pell diouz ar e'hoad, ar re fallakr,
kaz hag all ! hag e voe lakaet an tan en ti ! Mamm
Lizig, avat, a lakaas eul louzou war gein he
merc'h, ha setu ma kreskas d'ezi diouaskell nevez.
Hag e rôas d'ezi ivez eur steredennig all.

Gp5451 M



Diwar neuze e vevas Lizig eürus meurbet gant he mamm. Alies ez aent da welout o mignoned koz. Evid ar raned, n'eo ket Lizig e voc, hogen « Prinsezig an Dour ».

Sellit outi, aze, azezet war an dervenn goz, o heja he dourn d'eoc'h da lavarout kenavo.

Levraoueg Gwalarn

Setu aman roll al levrioù embannet betek-hen gant « Gwalarn ». Brudet a-walc'h int marteze evit na vo ket ezomm da gomz hiroc'h aman diwar o fenn.

Niv. 1. — AR ROC'H TOULL

romant, gant J. Kerrien.

diviet

Niv. 2. — WAR WARC'H D'AR MOR

pez-c'hoari, gant J. M. Synge, trôet diwar ar saozneg gant Y. Drezen.

dre ar post : 2 l. 25

Niv. 3. - TONKADUR BUGALE TUIREANN

danevell iwerzonat, addispleget gant R. Hemon.

dre ar post : 4 l.

Niv. 4. — AN AOTROU BIMBOCHET E BREIZ

romant, gant R. Hemon.

dre ar post : 6 l.

Niv. 7. — PRINSEZIG AN DOUR

danevell evid ar vugale, savet ha skeudennaouet gant G. Th. Rotman, trôet gant Y. Drezen ha R. Hemon.

dre ar post : 5 l.

Niv. 8. — GERIADUR GALLEK-HA- BREZONEK A GORFADUREZ

dre ar post : 1 l.

Niv. 10. — NEVEZ-AMZER

pez-c'hoari gant T. C. Murray, trôet diwar ar saozneg gant R. Hemon.

dre ar post : 4 l.

Levraoueg Gwalarn

War ar stern :

Niv. 5. — PEVAR SKOURR AR MABINOGI
danevellou, trôet diwar ar c'hembraeg gand Abeozen.

Niv. 6. — PROMETHEUS EREET ; ARBERSED
peziou-c'hoari, trôet diwar Aesc'hulos gant Y. Drezen.

Niv. 9. — GERIADUR BREZONEK-HA-
GALLEK
gant R. Hemon.

*(Bez' e c'heller diwar breman rakprena al labour-man. Priz:
15 l. evid ar rakprenerien, da veza paeet goude degouezet al lev-
ganto).*

G W A L A R N

kelc'hgelaouenn lennegel trimiziek
renet gant R. Hemon

Priz ar c'houmanant bloaz : 20 lur.

Goulenn " Gwalarn " hag al levriou embannet ganti digant :

Merour " Gwalarn "
Boîte Postale 75, Brest
C. C. 96-38, Rennes.

EVID AR VUGALE

« Prinsezig an Dour » n'eo nemet ar c'henta eus al levriou a fell d'imp embann e brezoneg evit bugale Vreiz. Re all a zeuio war o lerc'h, evid o diduella, hogen ivez, evit deski d'ezo lenn o yez, he c'harout hag he douja.

Dre ar brezoneg hepken e vo uhelaet stad speredel hor bro. Rei d'hor bugale an deskadurez e brezoneg a vo rei d'ezó, gant herez an amzer dremenet, ar frankiz en amzer da zont. Staget hon eus eta da labourat en hent-se.

Pell amzer a dremenno c'hoaz a-raok ma vo desket ar brezoneg en holl skoliou Breiz-Izel. E meur a lec'h zoken e vo ar skol gwas e nebourez ar yez. Neuze, ma n'hellomp ket kemer ar skol, kemeromp an ti. Rôomp d'hor bugale levriou brezonek ken brao ha ken plijadurus m'o devo c'hoant d'o lenn, daoust da gement tra a c'hello ober ar mestr-skol a-enep. Rôomp d'ezo levriou bravoc'h ha plijadurusoc'h eget al levriou gallek, — ha ma c'hellomp ivez, talvoudusoc'h... ha marc'hadmatoc'h.

« Prinsezig an Dour » hag al levriou a zeuio war e lerc'h a zo bet dibabet a-raoz e-touez ar re a c'hello ar muia *plijout* d'ar vugale. An danvez, da genta: darvoudou e-leiz en eur bed anavezet mat, deut da veza eur bed a souez. Ar skeudennou, goude: ken resis, ken speredek ha ken stank ma 'z eo eun drugar.

Tamallet e vo d'imp marteze beza aet da glask e bro Holland ar pez hor bije dleet klask e Breiz: klasket hon eus, ha n'hon eus ket kavet. Hogen klask a raimp c'hoaz.

A-unan gand al levriou-diduella-man e fell d'imp embann levriou-skol. Eul levr lennadurioù hon eus war ar stern. Moulet e vo. Hogen moulet e vije bet pell 'zo m'hor bije kavet muioc'h a skoazell. An neb a fell d'ezan hon harpa, ra gaso e brof ar c'henta ar gwella da:

Merour " Gwalarn "

Boîte Postale 75, Brest

C.C. 96-38, Rennes.

Notenn. — Ma c'hellomp, ez embannimp ivez al levriou-bugale hervez doare Gwened.

BREST

Moulerez, Straed ar C'hastell, 4

—

1927

0.6389

